


# An dizingalderioù dirak ar yec'hed: studiiñ



## I. Buhez div verc'h yaouank

1. Leuniit an daolenn goude bout sellet dooc'h o istor àr al lec'hienn Aozadur etrevroadel ar Yec'hed (OMS e galleg pe WHO e saozneg) :

[http://www.who.int/features/2003/lifeline\\_fr.swf](http://www.who.int/features/2003/lifeline_fr.swf) diell 1

|   | Aiko   | Mariam  |
|---|--|---|
| Bro ganedigezh                                | JAPON  | SIERRA LEONE  |
| Lec'h ganedigezh                              | KUMAMOTO   | FREETOWN  |
| Stad ar yec'hed pa oant ganet                 | Yec'hed mat  | Pouez-ganedigezh izel ha diouer a vitaminoù                           |
| Heuliet get ar medisinour                     | Bezañs ur gwiliouder, ur vamm-diegezh, ha klañdourien              | Hep bout heuliet get ur medisinour                                    |
| Gwarez enep d'ar c'hleñvedoù                  | Brec'het nep kleñvedoù bugale prouad diurnat enep d'ar c'hrign-bev | Brec'h ebet   |
| Mont d'ar skol                                | Lise ha skol-veur  | N'eo ket bet er skol  |
| Oad ar c'hentañ bugel                         | 30 vlez  | 17 vlez   |
| Skoazell medisinerezh evit ar <b>gwilioud</b> | Bet he deus pareoù e-pad ar brazeded ha goude                      | Kollet he deus e vugel kentañ d'ar ganedigezh – n'eus gwiliouder ebet |
| Stad da 30 vlez                               | Mezegezh bugale en un ospital                                      | Kontaminet get ar viruz sida- ne c'hell ket ken labourat              |
| Oad ar marv                                   | Chañs da veviñ kozh 85 blez  | marv da 34 blez   |

2. Get skoazell an daolenn, savit ur pennad é tisplegiñ ha keñveriiñ buhez Aiko ha Mariam. Gellet a rit krogiñ get ar frazenn-mañ: Buheziou Aiko ha Mariam eo disheñvel : Aiko a vev e Japon. Yec'hed mat a vez geti a-hed he buhez. Pa oa ganet e oa bet heuliet get ur gwiliouder hag ivez meur a glañvourien. Brec'het eo bet enep kleñvedoù-bugale (ruzell ..) hag ivez e vez heuliet alies evit ober prouadoù enep d'ar c'hrign-bev. Tremenet eo mat ar c'hentañ brazeded a-drugarez d'ar pareoù a-raok ha goude. Goude bout labouret el mezegezh-bugale he deus profitet ag he buhez marse betek 100 blez. Buhez Mariam n'eo ket bet ken pell: da 34 blez e oa achu. Da vare ar ganedigezh, e Sierra Leone e oa bresk he yec'hed. He mamm ne oa ket daet da benn en em vagiñ mat, emañ ganet Mariam get an diouer a vitaminoù hag ivez ur pouez bihan. Daet eo da benn da dreuzveviñ hag ivez stourmiñ ar c'hleñvedoù bugale o deus lazhet un nebeut ag he c'hamaraded peogwir ne oant ket brec'het , èlti. N'eo ket bet er skol hag he deus kollet he bugel kentañ peogwir ne oa ket heuliet get medisinourien. Kontaminet get ar SIDA, marv eo buan-tre hep bout paret . Buhez Aiko ha Mariam a zo penn-da-benn disheñvel.

## II. Stad ar yec'hed ar poblañsoù

## Diell 2

|            |   | Japon                 | Frañs                  | Sierra Leone          |
|------------|---|-----------------------|------------------------|-----------------------|
| Yec'hed    | Spi da vevañ pell                           | 82 vlez               | 81 blez                | 55 blez               |
| Yec'hed    | Marvezh ar vugale                           | 3,6 evit 1000 annezad | 3,33 evit 1000 annezad | 154 evit 1000 annezad |
| Yec'hed    | Oad-kreiz                                   | 44 blez               | 39 blez                | 17,5 blez             |
| Live-beviñ | Poblañs get nebeutoc'h evit 1 dollar/bemdez | Nebeutoc'h evit 1%    | Nebeutoc'h evit 1%     | 50%                   |
| Live-beviñ | An dour-red                                 | 100%                  | 100%                   | 53%                   |
| Live-beviñ | Niver a vedisinourien                       | 2,1/ 1000 annezad     | 3,2 /1000 annezad      | 0, 03/ 1000 annezad   |

1. Petra eo ar merkoù a ro titouroù àr stad ar yec'hed er stadoù?

**Chañs da vevañ kozh( spi da vevañ pell):** keidenn niver ar blezadoù a c'hell un den beviñ en ur Stad resis, d'ur mare resis.

**Marvezh ar vugale:** niver a vugale marv < ur blez evit 1000 ganedigezh

**Oad-kreiz:** oad a rann ur boblañs ag ur vro e daou strollad, un hanter yaouankañ , an hanter arall kozhañ.

2. Petra eo an diforc'h etre ar spi da vevañ pell e Japon hag e Sierra Leone? **-27 BLEZ**

3. Roit ur skouer tennet a vuhez Aiko a c'hell displegiñ e vez izeloc'h ar feur mervel evit ar vugale e Japon e-keñver Sierra Leone?

**Ar vugale e Japon e vez brec'het enep kleñvedoù bugale ha ket e Sierra Leone. Oc'hpenn ar vaouezed a chom hep sozell da vare ganedigezh ar bugel hag e Japon e vezant heuliet get ur vamm-diegez, klañdourien.....**

4. En em ziazeziñ àr vuhez Mariam hag Aiko, displegit perak e vez an oad-kreiz kalz uheloc'h e Japon?

**Marvel a ra an annezidi yaouank-tre e Sierra Leone , tapet get kleñvedoù dibare(ne c'hellant ket bout pareet) , èl ar sida, pareet nebeutoc'h , hep kaout al louzoù**

5. Diskouezit e vez al live-beviñ e Frañs ingal da vro Japon? Roit skouerioù

**Heñvel eo al live-beviñ e-barzh an div Stad-se : an dour-red a vez evit rac'h an annezidi, kavet e vez ar memes niver a vedisinourien. Hag ez eus nebeutoc'h evit 1% ag ar boblañs a vev get nebeutoc'h evit un dollar bemdez.....**

6. Daoustoc'h e vez ingal ar yec'hed e Frañs hag e Bro Japon?

**Tamm pe damm ingal eo stad ar yec'hed er Stadoù-se met e c'hell kaout dizingalderioù èl dasparzh a vedisinourien e Frañs: niverusoc'h int e kêr ha nebeutoc'h er maezioù, niverusoc'h int ivez e Ile-de France( strollet eo du-hon kalz a ospitalioù uhel hag ivez ez eus 10 million a annezidi) ha PACA( a-benn profitiñ ag an endro plijus get an hin plijus)**

**Dizingalderioù e vez ivez e-barzh frañs etre ar re a c'hell kaout ur asurañs Mutuelle hag ar re ne c'hellant ket paeañ .....**

# La démographie médicale en France

193 943 médecins en activité régulière\* au 1<sup>er</sup> janvier 2010


**Densité moyenne**  
309 médecins pour 100 000 habitants



**Nombre de généralistes et spécialistes pour 100 000 habitants**

- plus de 350
- de 300 à 350
- de 250 à 299
- moins de 250


Source : Ordre des médecins



\*dans un même lieu, sans les médecins remplaçants et ceux temporairement sans activité

AFP

### III. An avedurioù yec'hed



Diell 3: Ur prederva\* e Sierra Leone:  
Ur savadur mezegel e lec'h e vez dispañset  
prederioù marc'hadmat-tre pe digoust



Diell 4: Ur bloc'h-oberata e Bro Japon

7. Deskrivit an 2 skeudenn-mañ a-dal an temoù-mañ: savadurioù, benveg mezegel, akipamantoù, ar vedisinourien: petra kloziñ?

Ur bloc'h oberata: sal vras get akipamantoù uhel teknologiezh (skramm get ur c'hamera evit oberata), nevez-flamm, ar skipailh oberata a zo é tougen maskloù, menegoù ar pezh a zikouez e heuliant reolennoù yec'hedoniezh strizh-tre.

Er c'hontrell er prederva e vez bihan ar sal get mogerioù difuilhet, hep benveg mezegel nevez. Ur glañdourez a zo get he stetoskop é kemer tañsion an den azezet àr un daol.....

8. Diell 5: livit e ruz servij ar mezeg, e glas an akipamantoù hag e gwer an dispignoù evit ar yec'hed

| Diell 5 Merkoù   | Japon  | Sierra Leone      | Bed              |
|--|--------|-------------------|------------------|
| <b>poblañs</b>   | 128    | 6                 | <b>7 Miliard</b> |
| <b>PDG/ annezad</b>  | 34 000 | 700               | <b>10 252</b>    |
| <b>Feur mervel ar vaouezed da vare ar gwilioud</b>             | 6      | 2100              | ?                |
| <b>Mezeg evit 100 000 annezad</b>                              | 210    | Nebeutoc'h evit 1 | <b>13</b>        |
| <b>Gweleoù evit 100 000 annezad</b>                            | 140    | 4                 | ?                |
| <b>Dispignoù evit ar yec'hed ( e % ar pinvidigezh broadel)</b> | 8, 1%  | 4%                | <b>10%</b>       |



9. Diell 5: get skoazell an diell , displegit penaos eo kalite ar prederioù dispañset e-barzh an div vro? war ar yec'hedoniezh

Izeloc'h eo kalite ar yec'hedoniezh e-barzh ur prederva e Sierra Leone, ur stad paour eo Sierra Leone . Er c'hontrell e Japon e vez pinvidik ar Stad . An aveadurioù yec'hed en 2 stad-mañ a zo disheñvel.....

#### IV. Sierra Leone , ur vro paour

Medisinour hep harzoù (MSF) eo ur gevredigezh denegour a skoazell ar poblañsoù en arvar e pep lec'h er bed . Labourat a ra e Sierra Leone abaoe 1996:

Diell 6

Principale cause de mortalité chez les enfants de moins de cinq ans en Sierra Leone, le paludisme est la maladie la plus répandue dans le sud du pays. En 2007, les centres de santé soutenus par Médecins Sans Frontières ont traité plus de 100 000 cas.

MSF recourt à des outils de diagnostic et de traitement efficaces contre le paludisme. MSF a observé que seule la gratuité des soins et médicaments permet d'améliorer l'accès à des antipaludiques efficaces. La Sierra Leone étant un des pays les plus pauvres du monde, des frais médicaux, même bas, empêchent la population de consulter.

Pour rendre les traitements plus accessibles dans les zones isolées, MSF soutient 30 petits dispensaires en milieu rural. Depuis novembre, un programme pilote forme des travailleurs à l'utilisation de tests de diagnostic rapide du paludisme. Pour enrayer la maladie, il est également important d'informer et sensibiliser la population aux méthodes de prévention et de détection du paludisme, et d'encourager les gens à consulter rapidement. En 2006 et 2007, plus de 64 000 moustiquaires ont ainsi été distribuées [le paludisme s'attrape par piqure de moustiques].

Dans son hôpital de référence de Gondama, près de la ville de Bo, MSF offre aussi des soins pédiatriques et maternels et de la nutrition thérapeutique. Le centre admet chaque mois environ 500 patients en pédiatrie, 100 enfants malnutris et 50 femmes enceintes. En 2007, il a mis en service une nouvelle salle d'opération. Depuis mars, un programme de nutrition permet de traiter un plus grand nombre d'enfants. Ceux-ci viennent au centre de soins chaque semaine pour un bilan médical et recevoir leur ration hebdomadaire d'aliments thérapeutiques, une pâte de cacahuètes enrichie.

<http://www.msf-azg.be/fr/main-menu/msf-sur-le-terrain/msf-dans-le-monde/detail-pays/table/38.html>

10. Diell 6: petra eo an MSF?

Ur gevredigezh denegour eo hag a skaozell ar poblañsoù lakaet diaes e pep lec'h er bed.....

. Piv a gemer perzh e-barzh sistem yec'hed Sierra Leone?

Ar c'hevredigezhioù denegour a skoazell (Handicap international, médicament sans frontières).....


12. Perak? N'eus argant ebet get ar Stad a-benn sevel aveadurioù .

13. Get skoazell an diell 6: savit ur pennad berr é tisplegiñ perak emañ en arvar ar vugale e Sierra Leone ha peseurt oberiantizoù e vez lakaet e-pleustr get MSF evit gwellaat stad o yec'hed Kalz a vugale ne zebrant ket mat (gwallvagadur) pe ne zebrant ket trawalc'h is-vagadur). Skoazelliñ a ra MSF é pareaat ar vugale e-barzh e ospital, é oberata ar vugale, é roiñ dezhe boued get boued therapeutek.

Skoazelliñ a ra ivez MSF an dud hag ar vugale paket get ar paludism, implij a ra binvioù a-benn gouzout petra eo al louzoù mat da roiñ. Klask a ra ivez treuzkas ar gouzeigezhioù d'ar poblañsoù, anvet eo an diarbenn, é roiñ dehze skign-fubu hag a zo ar benveg nemetañ a-benn stourmiñ enep d'ar c'hleñved.

## V. Ar yec'hed, diazez an diorren

Liammet e vez yec'hed mat ur boblañs get elfennoù a-bouez studiet en dielloù.




Diell 7: leunnit ar brastres get skoazell ar gentel gwelet

Diell 8 ha 9: penaos e c'hell ar C'hallaoued dont da benn da gaout ur medisinerezh uhel ( evit paraat an dent, bout oberata, scanner....?)



Diell 8: ar Surentez Sokial e Frañs



Diell 9: ti an dentour get akipamantoù uhel

# Stadoù àr ziorren / paour

**Diouer a  
aveadurioù**

- Skoazell get ar stadoù pinvidik
- Skoazell get ar stadoù pinvidik
- Skoazell get ar stadoù pinvidik

diraez  
d'an  
dour  
red  
ebet

Niver a  
ospitalioù  
skort

Niver a  
skolioù  
skort

Niver a  
vedisinourien skort

Niver a  
gelennerien  
skort

kelc'h-bac'h

Yec'hedoniezh  
skort

Tud  
Dizek

Kudenn ar yec'hed foran  
Marvezh uhel: spi da vevñ pell berr

Diorren àr c'horrekaat/ Skort



